



Klaskerien ha treizherien soñjoù



Gwareziñ ar memor a dalvez kement ha sklêrijennañ an dazont. An holl ac’hanomp o devez tro ingal da dennañ kentel eus an Istor ha da sellet ouzh an tremened evit kompren an amzer-vremañ a-benn talañ gwelloc’h ouzh an dazont. Un hêrezh vresk eo ar glad sevenadurel, sokial, etnologel... zo eus ar brezhoneg. Ret-holl eo dimp gwareziñ memor hor re gozh, chom hep terriñ ar chadenn-se omp e karg anezhi, gwarantiñ e chomo bev ar brezhoneg, ha buhezek war un dro mar bez tu.

Abalamour ez eo tomm Penn-ar-Bed ouzh frankiz al liesseurted, abalamour ez eo diazezet pinvidigezh sevenadurel hor broad, en tu all da harzoù Penn-ar-Bed, war al liesseurted gwarezet ha lodennet, abalamour e ranker bezañ daou, unan a ro hag unan a resev, evit ma vo ur gwir dreuzkas, e ro lañs Kuzul-departamant Penn-ar-Bed d’ar c’houlzad **Klaskerien ha treizherien soñjou**. Kenober evit sevel pontoù etre ar remziadoù brezhonegerien a-benn ma tiwano, diwar lies emgav, kumuniezh ar memor, eo pal al luskad-se.

Trugarekaat a ran en a-raok an holl re a gemero perzh er c’houlzad-se, ha hetañ a ran e savo en-dro anaoudegezh hor gwrizioù ganto.

Pierre MAILLE

Prezidant Kuzul-departamant
Penn-ar-Bed

Ar raktres

Gant ar raktres **Klaskerien ha treizherien soñjoù** e kinnig ar C'huzul-departamant d'ar vrezhonegerien a-vihanik ha d'ar vrezhonegerien yaouank (skolidi an hentadoù divyezhek ha studierien) en em gavout evit kaozeal e brezhoneg.

A-hed ar bloavezh-skol, an dud yaouank, erru « **klaskerien soñjoù** » anezho, a zo o vont da zastum testenioù ha titouroù yezhel (gerioù, troioù-lavar) digant ar re gozh, « **an dreizherien** ». An tem a zo bet kinniget gant ar C'huzul-departamant eo hini al labourioù sezon, ar gouelioù hag an darvoudoù a ro lusk d'ar bloavezh.

Diwar an emgavioù-se e vo savet kelfilmoù, dre skeudennoù pe dre skrid, gant an dud yaouank. Servijout a raint da virout ur roud eus an eskemmoù.

Palioù al luskad

> **krouiñ liammoù sokial** etre ar rummadoù oad dre harpañ an eskemmoù e brezhoneg etre ar glaskerien hag an dreizherien

> **lakaat ar brezhoneg komzet da vevañ** dre harpañ an treuzkas anezhañ

> **ober evit ma vo gwelet mat o yezh-vamm** en-dro gant ar vrezhonegerien a-vihanik a-drugarez d'an eskemmoù gant ar re yaouank

> skoazellañ ar vrezhonegerien yaouank da **binvidikaat o anaoudegezh hag o mestroniezh eus ar yezh** dre zaremprediñ ar vrezhonegerien a-vihanik

> **gwareziñ ha lakaat war wel ar glad** a zo eus ar brezhoneg a-drugarez d'al labour dastum graet gant ar glaskerien.



Ar glaskerien soñjou

- > skolidi eus ar CEI betek ar CM2, skolajidi ha liseidi an hentadoù divyezhek publik ha prevez
- > studieren war ar brezhoneg e Skol-veur Breizh-izel Brest hag e Skol-veur Breizh-Uhel Roazhon
- > studieren brezhonegerien eus an hentadoù all (stummadurioù damvezegel, gounezvouederezh, glad, sokiologiezh, etnologiezh...)
- > an dud a zesk evit bezañ kelenner, stajidi ar stummadurioù brezhonnek dibaouez

... *a c'hell bezañ klaskerien soñjou.*

An dreizherien soñjou

An holl vrezhonegerien a-vihanik o deus c'hoant eskemm o soñjou pe o anaoudegezh gant ar vrezhonegerien yaouank, a c'hell bezañ treizherien soñjou.

An dreizherien a-youl vat o deus c'hoant kemer perzh e **Klaskerien ha treizherien soñjou** a c'hell mont e darempred gant ar C'huzul-departamant a gavo klaskerien evito. Gallout a raio ar glaskerien kavout treizherien o-unan ivez.

Ar gevelerien

> kevredigezhioù sevenadurel Breizh a dalvoudeka ar glad pe a ra war-dro ar bevaat lec'hel...

> tiez degemer ar re gozh pe kluboù an trede oad

> strollegezhioù lec'hel : kumunioù, kumuniezhoù kumunioù m'emañ ar glaskerien pe an dreizherien o chom

... *Gallout a ra ar gevelerien paeroniañ ur raktres dastum.*

Paeroniañ a dalvez kement ha :

> lakaat ar glaskerien hag an dreizherien e darempred hag aesaat o eskemmoù

> reiñ skoazell deknikel, danvezel, denel pe arc'hantel da raktresoù ar glaskerien hag an dreizherien.

Gant ur galv raktres lañset gant ar C'huzul-departamant e c'hell ar c'hevredigezhioù kemer perzh el luskad ha prientiñ ur raktres dastum dre genlabourat gant ur c'hlas divyezhek (skolioù, skolajoù pe liseoù).

Harpet eo Klaskerien ha treizherien soñjoù gant Rektordi Akademiezh Roazhon, Ensellerezh Akademiezh Penn-ar-Bed, Renerezh Deskadurezh Katolik an Departamant, Diwan Breizh, kevredigezh maered Penn-ar-Bed ha tud varrek eus bed ar c'hevredigezhioù hag ar Skolioù-meur.



Ar genstrivadeg

Loreet a vo raktresoù gwellañ **Klaskerien ha treizherien soñjou** e fin ar bloavezh-skol.

Ur priz a vo roet d'ar glaskerien ha d'an dreizherien evit pep rummad (skolidi, skolajidi, liseidi, studierien, kevredigezhioù) da-geñver ur **veilhadedg** a vodo an holl re o do kemeret perzh hag ar gevelerien.

Evit kemer perzh er genstrivadeg

Teuliadoù evit lakaat e anv a vo kaset da skolioù, skolajoù, liseoù divyezhek prevez ha publik Penn-ar-Bed, da skolioù-meur Breizh ha d'ar c'hevredigezhioù.

Mod-all, ar re all o deus c'hoant kemer perzh a c'hello goulenn un teuliad war-eeun digant ar C'huzul-departamant.

Mont e darempred ganimp

Kuzul-departamant Penn-ar-Bed

Klaskerien ha treizherien soñjou

32 boulouard Dupleix - 29196 Kemper Cedex

Pgz. 02 98 76 20 20 - Plr. 02 98 76 24 22

Postel : klaskerien@cg 29.fr

*Adkavit keleier ar glaskerien hag an dreizherien soñjou war lec'hienn Kuzul-departamant Penn-ar-Bed **www.cg29.fr***

